

ETRE AR PONT HA GWAIEN

*Eun nozvez hanv, ruz gant stered,
Evit frealzi va spered,
Am eus, e kuz, bountet va dor
Ha me d'an traon, warzu ar mor.*

*An avel fresk, war he alan
A zigas d'in c'houez ar balan ;
D'in eun eostig, kludet er roz,
A stlap, a-bell, e zoniou noz.*

*Hanter bleget war eur skabell
Eur paourkeaz koz, truilh, diskabell,
Evit kaout eun tamm boued d'e bred,
A ren e linenn en dour red.*

*Eun tour-tan, plantet el lann wenn,
A veilh ahont, a-uz va fenn,
E lagad aour, digoret bras,
A furch ar mor beteg ar Raz.*

*Ar c'hounnou, war ar bezin rouz
A lamm hep pres, a zans hep trouz,
Klevet a vez o mouez o klemm,
Pa stok o zal ar bili lemm.*

*Gant gliz an noz kempennet brao,
Rez an dremwel, al loar a zao,
Hag eur zell euz ar sked he deus
Va gloaz a voug, va foan a deuz.*

*Tud a dremen, echu o deiz,
Eul labous-mor a nij d'e neiz,
War ribl ar ster n'eus, hep dale,
En noz, nemedoun o vale.*

*Ar ger a gousk adrenv va c'hein,
Eur rod karr a zrask war ar vein,
Eur c'hi, a-gleiz, eur c'hi, a-ziou,
A laosk eur chilpadenn pe ziou.*